

Coupletic.

Nouel, nouel da Nedelec,
 Lost va rochet zo difrezet;
 Un tam qigsal d'e pinseslat,
 Hag un anduillen de griat.

(Vol. I, p. 420).

Canaouen
 Annetiq ha Lubin.

(421)

Var ton: Eh! mais, oui-dà!

Calonic va berjeren ha va hini ember
 Ne vezint nemet unan var ay oll daou- anter:
 Ac'hanta ta,
 Penos ec'h aller caouet droug en dra?

He g'inou anter zerrret ne ro nemet c'hoez mat;
 E sonjal e voa ^{1/2} rozen, e poqis dei ervat.
 Ac'hanta ta,
 Penos ec'h aller caouet droug en dra?

Un devez ur venanen a flêmas e dorn quen,
 Eur poqic eus ma g'inou e diflêmas souden.
 Ac'hanta ta,
 Penos ec'h aller caouet droug en dra?

(422) Un deiz all me euelas en e c'horf pros serret,
 Buan me e dibrennas, ha n'em gourdrourzas get,
 Ac'hanta ta,
 Penos ec'h aller caouet droug en dra?

Dousic etre e divrac'h aliès e cousgan;
 Arvizion em difuno, james n'en em gleman
 Ac'hanta ta,
 Penos ec'h aller caouet droug en dra?

M. Pitot - Duhellès, ancien miseur à Morlaix.

(Vol. I, p. 421-422.)

Couplet

A ris hag a ganis en eured eur mignon din.

Bugale, yec'het hag arc'hant,
 Prosperite, contantamant,
 A regetan deo'h, Itton,
 Couls ha d'o pried, va mignon;
 Prosperite, contantamant,
 Bugale, yec'het hag arc'hant.

fin. M. Pitot - Duhellès, ancien
 miseur à Morlaix.

(Vol. I, p. 422.)